



GANT AN TRAPISTED

---

## EUR VUHEZ GAER

A BINIJEN HAG A JOA

---

---

### AR VUHEZ ETERNEL !

Ne vezi ket beleg, den yaouank, va mignon ! N'out ket galvet gant Doue da bignat ouz an aoter ; n'ec'h eus ket a blijadur o studia levriou ; gwelloc'h e kavez lenn e levr an aotrou Doue, meuli Doue o sellet ouz e oberou burzudus... Marteze ive out desket, met douget out d'ober evel ar venec'h koz, da veva eur vuhez a binijenn evel o hini.

N'eus fors penaos eo, hep mont da veleg, ec'h eus c'hoant da veza da Zoue, d'en em gonzakri d'ezan, da veza lean en eur ober ar veuiou a baourentez, a c'hlanded, a zentidigigez. Klevet ec'h eus mouez Jezus : « Deus ganen ! » Hag e karfes kuitaat pep tra, nann evit gounit kant gwech muioc'h er bed, met evit gounit ar baradoz.

Mat eo. C'hoant ec'h eus da zavetei da ene. « Rak petra a dalv d'an den gounit ar bed holl, ma teu da goll e ene ? » Hag e karfes meuli Doue, e zikour da zavetei ar bed gant da bedennou ha da binijennou.

*Da belec'h mont ?*

Met neuze da belec'h mont ? En eur vreuriez misionerien ? Ne blij ket d'it ar studi. En eur vreuriez misionerien ? evit sikour ar visionerien ? Ne blij ket d'it redet dre ar bed. Buhez sioul al labourer douar a vije diouz da zoare.

Mat, selaou. E tiez an Trappisted ez eus leaned ha n'int ket beleien, n'int nemet Breudeur (1). N'e ket mevelien int karget eus labouriou an ti hag ar parkeier, met e gwirionez int leaned, voestled da Zoue evel o breudeur beleien, evel an Tad Abad e-unan. Daoust d'e vintr ha d'e vaz-abad, an Tad-Abad n'eo ket lean muioc'h eget an distera eus e Vreudeur. Holl o deus ar memes veuiou.

Aman e tremen an traou evel en den. E korf an den ez eus penn, daoulagad, daouarn, treid. An holl izili a ra pep hini e labour, hag evelse ez eus urz ha peoc'h.

*An Trappisted.*

Al leaned sistersianed a denn o hano eus eur gêr vihan eus ar Bourgogn, *Cistercium*, Cîteaux, el lec'h ma voe savet eur manati brudet.

Galvet int peurlies an « Trappisted », hag e vevont pell diouz trouz ar bed ha trouz ar c'heriou. O reolenn a zo bet savet gant sant Beneat (+ 543) hag a veve breman ez eus 1500 vloaz. E ziskibien, menec'h sant Beneat, o deus difraostet douar Bro-C'hall ha bodet e keriadennoù familhou al labourerien a oa koundaonet da labourat an douar. I eo o deus great eus ar Frans eur vro gaer ha pinvidik.

Hogen, e 1098, c'houec'h kant vloaz goude maro sant Beneat, eun ugent bennak a leaned a guiteas o manati Molesme evit dont da zevel e Cîteaux, e kichen Dijon, eur manati nevez. O c'hoant oa heulia penn da benn reolenn sant Beneat. O eil abad, sant Alberik, a reas d'ezo dilezel mantel zu ar venedik-tined evit kemeret mantel wenn ar Sistersianed.

Sant Alberik ive eo an hini a zavas ar Breudeur-

(1) « Frères Convers » e galleg.

lik, karget dreist pep tra eus labour ar meaz, evit ma c'hellfe al leaned gwenn, a labour e ganto er parkeier, kaout muioc'h a amzer da gana an ofisou en iliz.

*Ar Breudeur-lik (Frères convers).*

Great e vez d'ezo evel d'al leaned ; epad o buhez ha d'o maro int kemeret evel gwir vreudeur ; war meur a boent ar reolenn n'eo ket ken striz evito ; debri a reont ouz ar memes taol, hag o gweleou a zo henvel. Abalamour d'o labouriou, o dilhad a zo brun, hag e tougont o baro. Par int alies d'al leaned e santelez, hag uheloc'h zoken awechou. Meur a hini o deus brudet an Urz dre o miraklou. Eiz anezo a c'heller da enori evel sent.

*Penaos eo deuet Citeaux da veza an Trapp.*

Gant sant Bernard (+ 1153) kenta Abad *Clairvaux*, Urz ar Sistersianed a voe brudet bras, ha dre an Europ e voe savet eleiz a vanatioù, enno menec'h a gantchou. Epad meur a gantved e voe enna santelez vras. Dre ar brezelioù ha dre zempladurez an den e teuas falladenn. Er zeitekved kantved an Abad de Rancé (+ 1700) a lakeas da ren e Trapp Soligny (Orne) ar reolenn ken striz ha biskoaz. Dom Augustin de Lestrange a zaveteas an Urz goude ar Revolution hag hel lakeas da vleunia adarre e Frans : Meilleray, Port de Salut, Sept-Fons.

E 1892, ar Pab Leon XIII a unanas an teir Vreurieze Trappisted a oa neuze, hag e 1902, en eul lizer, ar Pab a zisklerias oa an Trappisted heritourien ar Sistersianed.

*Peden ar Breudeur-lik.*

En Urz-ze eman eta ar Breur-lik Trappist. N'e ket eur mevel eo, eun den o sikour re all, met eur *religiuz gwirion*, preparet epad daou vloaz, a ra da genta veuiou evit eun nebeut bloaveziou (3 bloaz) ha da c'houde evit ato hag en deus perz e holl c'hrasou an Urz.

Bemdez e c'hell klevet ha respont eun oferenn ha kommunia. Kemeret a ra perz en eul lodenn vras

eus an ofiz. Bez eman en eun ti a zav anezan, hep ehan, etrezeg an Nenv, leac'h ar bedenn. Douget eo, oc'h heulia ar re all, d'ar bedenn, pedenn an Iliz.

### An Ofiz.

Epad m'eman an Tadou e keur an iliz, o kana ar Psalmou, ar Breur-lik a zo unanet ganto a galon. Da zul ha c'houel e lavar, en iliz, e lec'h ar psalmou, ar *Bater* hag an *Ave Maria*. E ofiz a zo henvel awalc'h ouz hini an Tadou a vez er c'heur : memes amzer, memes lec'h, memes lidou. D'an derveziou labour, an ofiz a vez lavaret el lec'h ma labourer. Mar deus meur a hini, ec'h en em rannont e diou lodenn, ha troet etrezeg an iliz, ar Breudeur a c'hed ma raio ar c'hosa sin d'ezo. Kerkent, troet an eil ouz egile, e reont sin ar groaz, hag ar c'hosa a lavar : *Deus in adjutorium...* Ar re all a respont : *Domine ad adjuvandum...* Hag e stouont o fenn d'ar *Gloria Patri*. Hag e savont en eur lavaret : *Sicut erat*. Ha da c'houde *Pater, Ave*. Ar pedennou-ze a zo e lec'h ar psalmou lavaret e keur an iliz gant an Tadou, hag evel a weler, ar Breudeur a zo unanet dre ar bedenn gant an Tadou.

Sant Bernard, meur a wech, en deus meulet aked ar Breudeur evit ar bedenn. En noz araok hanter-eost, eur mesaer eus ar manati, an den eürus Didier, n'en doa ket gellet en em gaout er manati ; met eus a bell, pa glevas kloc'h an ofiz o seni, e chomas en e zav da bedi, troet etrezeg ar manati, unanet a spered hag a galon gant e vreudeur. Ha sant Bernard, sklerijennet gant Doue, a zisklerias da c'houde, dirag ar venec'h eo ar mesaer en doa enoret ar muia an Itron Varia.

### Ar pedennou a reont o-unan.

Epad an deiz, ouspenn, e kasont pedennou da Zoue, ar re a zo endro d'ar c'hezeg, d'ar zaout, d'ar moc'h, ar re a zo er parkeier a zav o c'halon gant karantez e trezeg an Nenv. Ne ehanont morse da bedi ; evel kanaouennan an alc'houeder, pedenn ar Breudeur-lik a bign d'an Nenv e doug an deiz.

*An devosionou.*

Ar Breudeur-lik a c'hell c'hoaz ober Hent ar Groaz, lavaret o chapeled ha zoken o Rozera, mont d'ar vered da bedi war beziou o Breudeur maro, mont d'an iliz d'ober tro an aoteriou, da bedi ar zent a blij ar muia d'ezo, da bedi dreist holl ar Vammvat an Itron Varia, Rouanez Cîteaux. Tremen a reont kalz amzer dirag ar Zakramant meulet ra vezo. Kemeret a reont perz er prosesionou. E gwirionez emaint gant Doue hed o amzer ; war hent ar baradoz.

Den yaouank, ha c'hoant ec'h eus da vaga da ene gant pedennou hir, er sioulder hag er peoc'h ; c'hoant ec'h eus da veva gant an Elez war hent an Nenv ? Neuze deus. Sae vrun ar Breur-lik da gaso d'ar Baradoz.

*Al labour.*

Al labour eo a enor ar Breur-lik oc'h ober anezan heñvel ouz zant Josef ha Jezus e Nazareth.

Breur, hag a zo o prepari ar pred, o pourchas ar pezh a zo ret, o lakat ar forc'h pe ar valaenn da vont en dro, o labourat gant ar rabod pe ar vouc'hal, te a ro amzer da Leaned ar c'heur da gana meuleudi Doue. Ma sentez mat, e c'hellez lavaret da Jezus :

« Aotrou, me a ra ar pezh hoc'h eus great epad tregont vloaz. Me a ra ar pezh a rafec'h em lec'h, ma vijec'h c'hoaz o veva en ti-man. »

*Al labour-douar.*

Al labour-douar eo a vez great dreist pep tra en Trapp, ha dre al labour e laker an douar da rei d'eomp tenzoriou burzudus. D'an nevez amzer, e vez netaet an douar, hadet karrotez, betrabez, plantet kaol, c'houennet, dilouzaouet.

Da c'houde e teu al labour bras : ar foenn, an eost ; dindan an heol bero pe er granchou e poanier da astenn, da zastum ar foenn a vago ar chatal, da zastum an ed a roio ar bara a vago korf an den hag ive ar bara a vezo konsakret ha chenchet e korf hon Zalver.

E miz Here e vez tenet ar patatez, e miz Du ar betrabez, e miz Kerzu ar rutabaga. An alar a dro adarre an douar, an avalou a zo malet evit ober chistr melen aour.

Ha setu aman ar goanv : ret eo pourchas koad d'ober tan, diskar ar gwez re goz, tenna ar c'hifiou, dastum ar vein diwar an douar, renka an hentchou, distanka ar fozier. En eur ger, epad ar bloaz an Trappist a zo e kreiz ar parkeier, a wel enno furnez ha kaerder ha madelez Doue oc'h en em ziskouez, rak digant Doue eo e teu d'eomp pep tra, Hen eo a laka ar glao da goueza, an heol da domma, Hen eo a ro d'eomp hor bara pemdeziek.

### *Ebars an ti.*

Pa vez glao, skorn, pa n'heller ket mont er maez, e vez skubet, **E**alc'het, kempennet an traou en ti, rak an ti a zo **E**bras. Ne vez morse maouez ebet er gouent, hag ar venec'h a rank griat, ober lichou hag an holl labourou.

Unan eus ar Breudeur a zo karget eus ar marchosi, eun all eus ar zaout, eun all eus ar yer, eun all eus ar formaj, eun all eus an elekrisite ; unan a zo kalvez, eun all boulanjer, eun all gôf (marichal). Hon Tad Sant Beneat a felle d'ezan e vije er manati kement a oa ezomm, dour, milin, fourn, evit n'o devije ket ar venec'h digarez da vont da c'haloupat er maez, rak an dra-ze, emezan, « n'eo ket talvoudus d'o ene ». Hor Breudeur a ra pep seurt micher : ober a reont panerou, brosou, balaenou, kement a zo mat da gaout en eun ti.

### *Skoueriou ar Zent.*

Al labouriou dister-ze a ra d'hor Breudeur chom izel a galon, a dorr enno nerz an ioulou fall. Sant Alfonz Rodriguez, epad ouspenn 40 vloaz, a vevas e lochenn eur porzier, a zigoras doriou, a bignas e skalhieriou, ha goulskoude e rae burzudou epad e vuhez ; gouzout a rae pedi, hen breur-lik, gwelloc'h eget an Tadou Jesuisted desket bras, hag uheloc'h

edo e skeul ar zantelez eget an Tad Rener a roe d'ezan geurc'hemenou.

Sant Paol, an abostol bras, a oa fouge ennan o tiskouez e zaouarn kaledet gant al labour. Sant Paolin, eskob Nol, a zilezas e vintr hag e vaz-eskob evit beza jardiner en eur manati dister. Sant Bernard, evitan da gaout nebeut a yec'hed, a labour e gant e vreudeur ; ha pa n'helle ket, abalamour d'e stomog, ober labourou tenn, e faoute keuneud pe e pale an douar. Sant Bonaventur a oa o voalc'hi al listri-kegin, pa zigouezas gantan Lizer ar Pab e hanve Kardinal. Sant Louis Gonzag, e skolaj Milan, karget da lemel ar gwiad-kefnid, a zeue laouen ar skubellenn en e zourn, da gaout ar prinsed ha prinsezed en doa anavezet e lez ar roue.

E urz ar Sistersianed, an den eürus Alexandr Foigny, mab eur roue, a voe Breur-lik ; n'oa anavezet nemet evit e humilite hag e ijin d'ober formaj. An den eürus Alan ha kalz re all, tud desket bras, a deu da gemeret sae vrun an Trappisted ba da voalc'hi ar skudellou.

Hag en amzer hirio, eur c'habiten dragoned, Gabriel Mossié, brezeller brudet war an dachenn, a deu d'an Trapp evel Breur-lik ; lezel a ra ar studi, an enor da veza beleg, evit en em rei d'al labourou distera.

An Tadou, gwir eo, a ro ar skouer d'o Breudeur-lik ; ar venec'h gwenn, en o fenn an Tad Abad, a labour eus 4 da 6 eur bemdez hervez amzeriou ar bloaz. Ar Breudeur a labour 9 eur er goanv, 10 eur en hanv. Dre al labour eo e vez chenchet stumm d'an traou endro d'eur manati. P'en em gavas ar venec'h e Thymadeuc, e 1841, e kavjont eno lanneier, lagennou, douarou n'oant nemet berniou mein. En em lakaat a rajont da zifraosta, da zizec'ha, da ziveina ar vro-ze, d'he glebia gant o c'houezenn, hag el lec'h n'oa gwechall nemet loened treut o peuri, e weler breman ed, patatez, pep seurt traou kaer, chatal evel n'eus ket e lec'h all. Da heulia an Trappisted an dud tro-war-dro eus Creden, Brehan, n'oa gwechall nemet eun nebeut loened treut, a dre-mene amzer ar veilhadeg er goanv o neza evel ar

merc'hed, o deus ive difraostet o douar ha bremanec'h eostont traou mat hag ez int deuet da veza pinvidik.

Etouez al labourerien em gavet da genta e ranker henvel ar breur Palemon n'eo ket c'hoaz ankounac'het er vro ; krenv evel eur marc'h, e tenne e-unan eur wezenn a-bez ha meur a wech e tistroas d'ar manati gant an alar war e skoaz ; ar breur Josef, maro e 1871, a oa leun a zouster evit al loened, hag ar veleien tro war dro hen roe da skouer d'o farresioniz ; ar breur Paolin a zo bet skrivet e vuhez, rak maro eo evel eur Zant. Er vered hon eus e Thy-madeuc, ha dreist pep tra er c'hornad a vez ennan anterret ar Breudeur-lik, ez eus relegou sent, diniver.

Den yaouank, ma karez kanaouen an douar, ma karez ar bleuniou, an ed melen aour, al labour dindan heol an Otrou Doue e kreiz al loened krouet gant ar Mestr evit hor zervicha, neuze deus, hag e weli.

Aman, pell diouz an trouz  
Hag holl safar ar bed.  
Ar maeziou am c'helenn kerkoulz  
Hag an habilla doktored.

#### *Ar binijenn.*

Ar micherour, ar martolod, ar zoudard, ar bourc'hiz, ar marc'hadour, a glask gounit arc'hand evit amzer o c'hozni. Gounit buan ha kalz evit kaout plijadur da c'houde.

An Trappist ne labour ket evit gwellaat e stad a vuhez ; en hent eman etrezeg ar baradoz, hag e ra pinijenn. Rei a ra d'e gorf ar bevans hag ar c'housket a zo ret, ha netra ken.

#### *Ar c'housket.*

Ar reolenn a ro seiz eur d'ar c'housket ; en hanv c'houec'h eur epad an noz hag eun eur goude lein. War zao vezer da ziv eur diouz ar mintin, er goanv evel en hanv, ha da zul da eun eur hanter. Sant Beneat a fell d'ezan ez afe « soudarded ar C'hrist » da gousket gant o dilhad ; war eur c'holc'hed kalet, er memes dortouer, gant pep ini e doullig-kambr.

Al leziregez n'eus ket a blas en Trapp ; ma teu eur breur da gousket epad an ofiz, epad ma vezer o lenn, e amezeg a dle e heja hag hen dihuna. Rak-se, pa vez deuet ar mare da gousket, e kousker c'houek ; amzer da zonjal e Doue, da gomans eun *Ave Maria*, hag emer kousket betek ma teuio adarre ar c'hloc'h da c'hervel evit adori Doue.

### *Ar prejou.*

Morse kig, met pep seurt traou all : patatez, piz, fa, soubenn al legumach, traou yac'h hag e zalc'h an den war e bloum. Diouz ar mintin, d'an deziou ma 'z eus merket da yun gant an Illiz, ar Breur-lik ne gemer netra. En derveziou all e kemer eur skudellad soubenn vat pe eun tamm bara gant eur volennad chistr, ha diouz an noz eun tamm mern vihan.

Ar boued a zebrer eo : legumach, leaz, frouez, formaj. An amann, ar viou, ar pesked, ar c'hig, ar c'hafe n'int ket anavezet. Prepari a c'heller ar boued gant amann pe eol. Hag o veza ma vez naon, stomog yac'h, e tebrer gant plijadur ar pez a vez servichet war an daol. An aotrou Kamilh de Meaux, deuet d'an Trapp da Aiguebelle e 1841, d'an oad a 72 vloaz, a skrive c'houec'h miz goude : « Derveziou zo hag em bevez kalz plijadur o tibri ar pez a zervicher d'in. »

Kousket ha debri, an Trappist her gra rak eun dra ret eo, met karet a ra dreist pep tra douster buhez ar manati hag ar sioulder a zo ennan.

### *Buhez ar venec'h.*

An Trappist ne vez morse e-unan. Ato unanet gant e vreurder el labour hag er bedenn, ec'h en em harp warne evit sevel betek Doue. Ar skoueriou mat a wel endro d'ezan a ro nerz. Beva gant re all, gwir eo, a zo eur binijenn, *ar vrasa pinijenn*, a lavare Sant Louis Gonzag, rak ar breudeur o deus an dever d'ober rebechou d'o breudeur, d'o dihuna pa gouskont en ofiz, da c'houlenn ma vezint ato dereat

ha direbech e pep tra. N'eo deus ehan ebet ; amzer ebet n'eo merket evit c'hoari, pourmen, fumi; ret eo mont gant tiz war hent ar baradoz; eno e vezo amzer d'en em ziskuiza.

### *Difenn da gaozeal.*

An Trappist ne gomz morse gant e vreudeur nemet dre sin ha pa vez ret. Lezenn ar sioulder a zo striz. Al labourer a c'hell, evit en em ziskuiza, lavarret eur farserez vennak, kana eur ganaouenn. An Trappist a jom sioul; digeri a ra e vuzellou da bedi, da gana ar *Salve*, diouz an noz, da govez e bec'hejou, da zigeri a galon d'an Tad Abad. Komz a c'hell ive evit oberiou e garg, pa vez ret, hervez m'eo aotreat gant ar Reolenn hag an Tad Abad. Met a hent all, peoch, sioulder e pep lec'h : Doue hepken o komz hag e grouadurien o selaou.

Hag evelse ar Breur-lik a zalc'h kaer e ene. Er bed e koller amzer hag e reir pec'hejou o kaozeal; an Trappist ne wel en e vreur nemet an tu mat, hag e ziskouarn, sarret da drouz ar bed, a c'hell da zigeri evit klevet mouez Doue.

### *Eur vuhez eürus.*

Setu aze buhez an Trappist : pedi, labourat, ober pinijenn. Pedi a ra evit an Iliz hag en hano an Iliz; paca a ra evit e bec'hejou ha pec'hejou ar bobl, dastum a ra danvez evit ar baradoz : Kaout poan pegentoc'h en em zieza eur pennadig amzer, ha da c'houde eun eürusted heb ehan. Ha gwir int ar geriou skrivet war mogerioù meur a vanati :

« Ar blijadur da vervel hep poan a dalv mat ar boan da veza hep plijadurezioù. »

Hep *plijadurezioù*, met ne lavaromp ket heb eürusted. Rak o veva e vuhez kalet, an Trappist a zo eürus, yac'h a gorf hag a spered, laouen e galon. Beva a ra alies koz-köz, betek 70, 80, 90 vloaz. An den eürus Alan a jomas betek e 116 vloaz, var a lavarar.

*Eur maro mat.*

An Trappist a varv en eur vouze'hoarzin. « Er bed ar maro a zo o c'hedal ar re goz e kichen o dor, ar re yaouank e pep lec'h ». Aman den ebet n'eo paket gant ar maro. Ar maro ne ra ket aon ; gortozet eo gant mall, rak digeri a ra dor ar baradoz.

An Trappist en deus sonjet mat ar maro, ha bemedez eman oc'h en em brepari gwelloc'h. Dont a ra e eur ziweza : astennet war al ludu, eo sikouret gant an Tad Abad hag e genvreudeur o lavaret psalmou betek an tremenvan. Pa eo bet galvet gant ar maro, e gorf a vez goalc'het, sebeliet, hag ezans ar pedennoù a zo endro d'ezan. Kaset e vez d'an iliz evit an anterramant dizolo en e arched ha da c'houde, gant kêñ ar psalm « *In exitu* » e vez douget d'ar veret. Eno e vez diskennet goustadik er bez toullet evitan, e zivree'h a vez laket e kroaz, e benn a vez golet gant ar gougoul, hag e taoler douar warnan. Eno em'an da c'hedal deiz gloriüs ar resureksion ziweza.

*Den yaouank, deus !*

Den yaouank, klask a rez eul lec'h evit dere'heil da ene da Zoue : en Trapp e kawi al lec'h ze.

Klask a rez eul lec'h evit harpa da zempladurez : en Trapp e kavi nerz.

Klask a rez ar porz goude ar barr'amzer : en Trapp eman porz ar zilvidigez. Aman e vezi difennet diouz an aveliöu fall hag ar barrou-amzer.

*Eur ger lavaret gant Foch.*

E 1915, en deiz araok sul er Bleuniou, ar jeneral Foch a zigouez en eur manati Trappisted :

« Dont a ran aman da gesta, emezan ; fizians em eus er bedenn, met muioc'h c'hoaz er binijenn ; gouzout a ran e kresko c'hoaz ho pinijennou epad ar zizun zantel. Kinnigit anezo da Zoue evit an taol emañ o vont d'ober, ha gant sikour pinijennou an Trappisted, an trec'h a vezo d'eomp. »

Da zeiz ar varn, nag a Vreudeur-lik a vezo souezet o welet pegement o buhez kuzet he devezo takvezet da c'hloar an Iliz ha da zilvidigez ar bec'herien.

*Petra zo ret evit dont d'an Trapp.*

Da genta, kaout yec'hed. N'eo ket ret beza eus ar re grenva. Meur a hini o deus startaet o yec'hed en Trapp.

Kaout eur spered eün. Eur penn great mat a zo gwelloc'h eget eur penn leun a voged hag a avel.

Gouzout senti, gouzout ober vad, beza izel a galon; karet ar sioulder, ar peuc'h, karet beva kuzet hag ober pinijenn.

Mar gellez kement-se, deus. An Trapp a zo great evidot. Ha goude ma vijes o chom e kaer, micherour (1), deus. Gouzout a rez senti. Savet out bet evel eur gwir gristen. Marteze ez vihan ec'h eus klevet mouez Doue. Deus ! Aman e c'helli beza holl da Zoue.

*Paotr yaouank va bro.*

Breizad, savet e kreiz ar gwez dero hag al lann alaouret pe demdost d'ar mor bras, boazet da veva er maeziou, te a vezo aman en da vro; aman da ene a zavo uhel uhel.

Ugent vloaz ec'h eus. Mat tre ! Tregont pe ouspenn ; mat c'hoaz. N'ec'h eus ken d'ober nemet diskouez bolonte vat, lakat da spered da blega, da zenti epad ma vezi oc'h en em brepari da veza lean, hag e kinnigi da gorf da Jezus evit labourat, poania, senti, ha da deod evit meuli Doue. Rak da senti e pezo beteg ar maro.

Ha goude eun nebeut bloaveziou tremenet oc'h ober pinijenn o veva eur vuhez leun a joa hag a zouster, e kani da viken madelez an Aotrou, e kreiz familh vras ar Sistersianed, er Baradoz.

---

(1) N'eo ket hepken evit an dud ar maez eo great an Trapp. Tud ar c'heriou ive a en em gav mat aman. Kement hini en deus ioul da veza da Zoue, kement hini a zo gouest da labourat, da zenti a gavo aman peadra d'ober hag a en em blijo.

*Reolenn an Trapp.*

Penaos e tremen ar Breudeur-lik o amzer. — Ouspenn an oferenn, ar gommunion, ar pedennou goude ar gommunion, a c'houlenn oll wardro eun eur, div eur d'an nebeuta a zo roet da zonjal war draou an nenv ha d'ober pep seurt pedennou ; bez ez eus c'hoaz amzer da lenn, muioc'h pe nebeutoc'h, hervez mareou ar bloaz, bez ez eus konferansou.

Setu aman er goanv, implij an amzer d'an derveziou labour.

*Mintin.* — 2 eur. — War zao. Ofiz ar Werc'hez.

2 eur 1/2. — Meditation.

3 eur. — Labour, legumach da brepari ; gourc'hemennou evit an deiz.

4 eur. — Oferenn ; kommunion ; ofiz Prim. Refektouer ; labour.

7 eur 3/4. — Tiers ha Sext, el lec'h ma labourer.

10 eur 3/4. — Fin d'al labour ; None ; Amzer libr ; Examin.

11 eur 1/2. — Angelus ; Merenn.

*Pardaez.* — 1 eur. — Konferans gant an Tad Rener.

1 eur 1/2. — Labour.

4 eur 1/2. — Gousperou el lec'h ma labourer.

5 eur. — Fin d'al labour. Amzer libr. Mern vihan.

6 eur 10. — Pennad-lenn. Komplidou. *Salve.* Angelus. Examin.

7 eur. — Da gousket.

D'ar zul ha d'ar goueliou ez eus muioc'h a amzer libr. Ar Breudeur, en derveziou-ze, a vez en ofisou evel leaned ar c'heur. Tremen a reont o amzer o lenn levriou santel, oc'h ober hent ar groaz, oc'h adori ar Zakramant, o taoulina e kichen an aoteriou, o pedi er vered, o vont da gaout an Tad Abad pe an Tad kovesour.

Evel ma weler, ar Breudeur o deus tro da zantellaat o ene. Meur a hini a zo desket bras war ar relijion, hag en o zouez ez eus kalz hag a zo savet uhel e karantez Doue hag a vezo sent bras er baradoz.

*Evit en em gaout e Thymadeuc.*

1. Dre Bontivy pe Loudéac. Ar re o deus eur « vélo » a c'hell diskenn e Loudéac, hag ac'hano o deus 3 leo d'ober. Ar re o deus eur valizenn a c'hell kemeret e Pontivy an « autobus Pontivy-Josselin », hag ec'h en eur gavont en tu all da Rohan, e Quengobriant, 1.200 metr diouz ar manati.

2. An dud yaouank a c'hoanta ober eur retred a tri pe bevar dervez a vez ato digemeret mat. Hag e c'heller gwelet ar manati penn da benn, hag ive ar granchou, ar c'hreier.

3. An neb her goulenno, a vezo kaset d'ezan evit netra eul levr kaer, skeudennet : « Histor Itron Varia Thymadeuc ».

*Ha Doue da veza meulet da virviken !*